

Les champs libres

Bibliothèque
Espace des sciences
Musée de Bretagne

Guy Le Querrec

Conteur d'images

PARCOURS PHOTOGRAPHIQUE
19 MAI > 26 AOÛT 2018 - RENNES



Baie de Kernic, Plouescat, Finistère Nord, France, 5 août 1973 - Guy Le Querrec / Magnum Photos

MAGNUM
PHOTOS

un événement
Télérama

BRETONS

fovearts

Leica

REGION
BRETAGNE

UNIVERSITÉ
DE BRETAGNE

m

METROPOLE
Rennes
vivre en intelligence

Guy Le Querrec

Konter skeudennoù

HENTAD LUC'HSKEUDENNOÙ

19 MAE > 26 EOST 2018 – ROAZHON

Guy le Querrec, conteur d'images

Guy Le Querrec n'a jamais vécu en Bretagne mais il ne l'a jamais quittée.

Membre de la troisième génération de l'émigration bretonne vers la capitale, il naît et grandit à Paris. C'est dans les années 1950-60 entre le Morbihan et les Côtes-du-Nord que se développe son attachement à la région, au cœur des vacances familiales, au cœur des souvenirs.

Avec de nombreux allers-retours entre Paris et Redon, Malansac ou Tonquédec, Guy Le Querrec se forge un regard hybride, à la fois complice des situations vécues mais aussi extérieur à celles-ci.

De ses premiers « balbutiements oculaires » jusqu'aux reportages personnels ou de commandes des années 1970-80, le photographe, entré à l'agence Magnum en 1976, n'aura de cesse de tourner son objectif vers ses semblables. L'ordinaire, le quotidien, le hasard caractérisent son écriture photographique, matinée d'un sens hors pair du cadre – ou du hors champ – et d'une bonne dose d'humour et de dérision.

Guy le Querrec, ur marvailher skeudennoù

Biskoazh n'eo bet Guy Le Querrec o vevañ e Breizh met biskoazh n'en deus kuitaet anezhi.

Ganet eo e Pariz, hag eñ Breton divroet eus an trede remziad, hag eno en deus bevet e vugaleaj. E-kerzh ar bloavezhioù 1950-60 e krogas d'en em dommañ ouzh Breizh da-geñver ar vakañsoù gant e familh, etre ar Mor-Bihan hag Aodoù-an-Arvor, e kreizig-kreiz an eñvor.

Dre forzh mont ha dont n'ouspet gwech etre Pariz ha Redon, Malañseg pe Tonkedeg, e voe savet gant Guy Le Querrec e zoare mesket da sellet ouzh an traoù, war un dro a-unan gant an traoù a vez bevet hag er-maez anezho ivez.

Adalek ma krogas da « vegeliat e sell » betek e gelaouadennoù personel pe diwar goulennoù er bloavezhioù 1970-80, n'eo ket paouezet al luc'hskeudenner-mañ, aet e-barzh an ajañs Magnum e 1976, da dreiñ e lagad davet e nesañ. An traoù ordinal, re ar pemdez, degouezhet dre chañs, a ya d'ober perzhioù e stil, mesket gant e skiant dispar eus ar stern – pe eus e-maez ar stern – hag un tamm mat a fent hag a oapaerezh.

Quelques repères

1941 Naissance à Paris

1953 Premier appareil photographique, un FEX reçu en cadeau de Noël du comité d'entreprise de la banque dans laquelle travaille sa mère et première photographie

1954 Seconde photographie lors du passage du tour de France à la Roche-Bernard : le coureur Attilio Redolfi

1962 Achète son premier Leica, un III G

1964 Première photographie de Michel Portal – Reportages sur le jazz et la musique

1969 Photo-reporter pour *Jeune Afrique* - Reportages en Afrique

1972-75

Co-fonde l'agence Viva. Reportage *La Bretagne, La famille en France, Le Portugal, la Révolution des Œillets*

1976 Entre à Magnum, élu membre en 1977

1983 Création du photo-concert « *De l'eau dans le jazz* » avec le quartet Michel Portal, Louis Sclavis, Henri Texier, Jean-Pierre Drouet aux Rencontres de la photographie d'Arles

1990 Reportage aux États-Unis, série Big-foot mémorial auprès des Sioux Lakotas

1995 et 1999

Édition de *Carnets de route, suite africaine*, sélection de photographies issues des reportages en Afrique entre 1968 et 1998 et mises en musique par le trio de jazz Aldo Romano, Louis Sclavis, Henri Texier

2006 Invité d'honneur des Rencontres d'Arles

2016 Premières expositions en Bretagne des photographies bretonnes au Centre atlantique de la photographie de Brest, L'imagerie de Lannion, Le Lieu de Lorient. Publication aux Éditions de Juillet de *Guy Le Querrec en Bretagne*

Darvoudoù pouezus en e vuhez

1941 Ganedigezh e Pariz

1953 E luc'hskeudennerez kentañ, ur FEX bet evel prof Nedeleg digant poellgor embregerezh ar bank lec'h ma oa e vamm o labourat ; e luc'hskeudenn gentañ

1954 Eil luc'hskeudenn da-geñver Tro Frañs er Roc'h-Bernez : ar reder Attilio Redolfi

1962 Prenet e Leica kentañ gentañ, un III G

1964 Poltred kentañ Michel Portal – Kelaouadennoù war an jazz hag ar sonerezh

1969 Luc'hskeudenner-kelaouaer evit *Jeune Afrique* - Kelaouadennoù en Afrika

1972-75

Krouidigezh an ajañs Viva asambles gant tud all. Kelaouadennoù *Breizh, Familhoù e Frañs, Portugal, Dispac'h ar Jenofl*

1976 Mont e-barzh Magnum, dilennet da ezel e 1977

1983 Krouet gentañ ar foto-sonadeg « *De l'eau dans le jazz* » gant ar pevarad Michel Portal, Louis Sclavis, Henri Texier, Jean-Pierre Drouet da-geñver Emgavioù al luc'hskeudennerezh en Arle

1990 Kelaouadenn er Stadoù-Unanet, ar rummad Big-foot Memorial gant ar Sioued Lakota

1995 ha 1999

Embannet *Carnets de route* ha *Suite africaine*, dibaboù luc'hskeudennoù tennet da-geñver kelaouadennoù en Afrika etre 1968 ha 1998 da-heul sonerezh gant an triad jazz Aldo Romano, Louis Sclavis, Henri Texier

2006 Kouviad a enor en Emgavioù Arle

2016 Diskouezadegoù kentañ e Breizh gant skeudennoù tennet e Breizh, e Centre atlantique de la photographie e Brest, L'imagerie e Lannuon, Le Lieu en Orient. Embannet al levr *Guy Le Querrec en Bretagne* gant an ti-embann Éditions de Juillet

Malansac, Le temps des vacances

Dans les années 1950-60, Guy Le Querrec passe une partie de ses vacances dans la maison familiale de Malansac, petit bourg du Morbihan. C'est là que vit la branche maternelle de la famille. Chaque été, sa mère, Simone Audran y retrouve ses parents, oncles et tantes, cousins et cousines, voisins. Guy se

souvent des ballades à trois à scooter, ces jours heureux à la pêche sur l'Oust avec l'oncle Joseph de Redon ou les copains de Malansac.

Les images qu'il fixe sur la pellicule une décennie plus tard, se rattachent à ces souvenirs : les activités quotidiennes d'un bourg de campagne, le travail de la terre, la kermesse, le marché ou la tuerie du cochon.

Le regard, observateur d'une réalité qu'il connaît bien, devient complice des habitants, révélant aussi une part d'intimité du photographe, de ses souvenirs les plus chers, liés à l'enfance.

Malañseg, amzer ar vakañsoù

Er bloavezhioù 1950-60 e teue Guy Le Querrec da dremen ul lodenn eus e vakañsoù e ti e familh e Malañseg, ur bourk bihan er Mor-Bihan, lec'h ma oa e familh a-berzh e vamm o vevañ. Bep hañv ez ae e vamm, Simone Audran, di da adkavout eontred ha moerebezed, kendirvi ha kenitervezed, amezeien. Soñj en deus Guy eus pourmenadennoù tri-ha-tri dre skouter, eus an devezhioù eürusted pa veze o pesketa war an Oud gant e eontr Joseph eus Redon pe mignoned eus Malañseg.

Liammet eo ar skeudennoù lakaet gantañ war ar c'hoc'hennoù dek vloaz diwezhatoc'h, ouzh an eñvorioù-se : ar pezh a vez graet war ar pemdez en ur bourk war ar maez, labourat an douar, ar c'hermes, ar marc'had peotramant diwadañ ar pemoc'h.

Dirak fedoù anavezet mat gantañ e teu sell al luc'hskeudenner da vezañ a-unan gant an dud, diwar se e teu ul lodenn eus deun e ene war wel ivez, eus e eñvorioù an tostañ d'e galon, stag ouzh e vugaleaj.

Ceux d'ici

Si Malansac constitue un terrain photographique de choix, Guy Le Querrec s'imprègne également de biens d'autres lieux de Bretagne.

Lorsque dans le cadre d'une commande, il photographie un sujet particulier, il profite de ce déplacement pour repérer via la presse locale, les événements susceptibles de constituer une thématique d'intérêt.

La photographie, dit-il, est une partie de cache-cache entre le réel et soi : de ce jeu permanent Guy Le Querrec perçoit et saisit la trace d'instantanés décalés et souvent drôles. Ses photographies offrent ainsi des images d'un quotidien à priori ordinaire, mais qui comporte toujours une petite part d'imprévu, comme un moment suspendu, fortuit et surprenant. Sous la forme d'une maxime, Guy Le Querrec nous invite à « regarder ce qui se passe autour, aux alentours et dans les contours ».

Tud ac'hann

Ha pa vefe danvez eus ar c'hentañ e Malañseg evit ul luc'hskeudenner ez a Guy Le Querrec da glask e awen e lec'hioù all a-leizh e Breizh.

Pa vez goulennet digantañ mont d'ober poltredoù eus ur sujed bennak e klask gouzout, o lenn ar c'hazetennoù, hag-eñ ne vefe ket danvez luc'hskeudennoù gant darvoudoù all er memes kornad, kement ha tennañ e vad eus ar veaj.

Luc'hskeudenniñ, emezañ, zo un abadenn koach-koukoug etre an den hag ar wirionez : santout ha tapout a ra Guy Le Querrec roudoù eus predigoù digustum ha fentus peurvuiañ diwar ar c'hoari dibaouez-se. Gant e boltredoù e weler neuze skeudennoù ur vuhez pemdez hag a seblant ordinal da gentañ, met atav e vez enno un tamm tra dic'hortoz, evel ur mare a-istribilh, souezhus ha deut dre zegouezh. Pedet e vezomp gant sturienn Guy Le Querrec da « sellet ouzh ar pezh a dremen tro-dro, en trowardroioù ha war ar bevennoù ».

Entre-soi

Le mariage demeure dans le courant des années 1970 un événement familial majeur.

La présence d'un photographe fait partie du rituel de la cérémonie, et des images très codifiées naissent des séances de pose. Guy Le Querrec se place lui en marge de cette approche, soit comme observateur de l'acte photographique, soit comme élément perturbateur. Il met en images les coulisses de la fête, le relâchement général au fil de la journée, ou encore la posture décalée de certains acteurs, comme celle des enfants par exemple.

Istorioù familhoù

Er bloavezhioù 1970 ez ae an euredoù d'ober unan eus an darvoudoù pennañ e buhez ar familhoù.

Ar c'hiz eo kaout ul luc'hskeudenner e-pad al lidoù ha produet e vez skeudennoù diouzh ur patrom strizh da-geñver abadennoù poziñ. En em lakaat a ra Guy Le Querrec e-maez ar gizioù-se, pe e vefe evel an hini a sell ouzh labour al luc'hskeudenner, pe an hini a zeu da zegas fourgas en afer. Taolenniñ a ra kostezioù ar fest, an dud laoskoc'h-laosk bep ma ya an devezh hebiou, pe c'hoazh emzalc'h dic'hortoz lod eus an dud, evel ar vugale da skouer.

Réjouissances

Fêtes religieuses ou laïques constituent un thème cher à Guy Le Querrec. Réjouissances spirituelles ou prosaïques ponctuent l'ensemble de son travail en Bretagne : des festivals de musique aux manifestations sportives, en passant par les fêtes des labours ou les fêtes folkloriques, toutes les occasions de se retrouver et de festoyer offrent autant d'*occasions* photographiques. Cette thématique se révèle par les *à-côtés* des événements : le détail d'une posture improbable, une situation anachronique ou un cadrage original mettent en scène de façon décalée ces fêtes populaires.

Dudioù

Plijout-kaer a ra danvez ar festoù relijiel pe laik da Guy Le Querrec. Adkavet e vez plijadurioù speredel pe danvezel hed-ha-hed e labour e Breizh : festivalioù

sonerezh koulz hag abadennoù sport, anez ankouaat fest an arat pe ar festoù folklorel, kement digarez d'en em gavout asambles evit festailhiñ zo un digarez ivez da dennañ poltreoù. Perzhioù dibar an tem-mañ a zeu diwar *kostezioù* an darvoudoù : munudoù un emzalc'h dic'hortoz, un degouezh diamzeriet pe un doare dibar da gouchañ ar poltre a zegas ur mod dic'hortoz da daolenniñ ar festoù poblek.

Parasols et sable fin

Les vacances sont synonymes de Bretagne pour le jeune Guy Le Querrec. Il est donc naturel que devenu photographe, elles constituent une riche source d'inspiration. La plage n'est pas seulement le lieu des baignades et des jeux d'enfants, les adultes y pratiquent aussi des activités diverses saisies avec humour, révélant un comique de situation involontaire. L'insolite se mêle à la drôlerie de gestes ou de postures naturels, saisis sur le vif, avec bonheur et humanité. Le climat breton, partenaire incertain des joies de la plage, invite Guy Le Querrec à attraper au vol des scènes amusantes et décalées.

Disheolieroù ha traezh fin

Vakañsoù a dalveze kement ha Breizh evit Guy Le Querrec pa oa yaouank. Rak-se int deuet, en ur mod naturel, da vezañ unan eus mamennoù puilh e awen. Ouzhpenn lec'hioù evit kouronkañ hag evit c'hoarioù ar vugale eo an traezhennoù, ur bern traoù a vez graet enno gant an dud vras hag a vez tapet en ur mod fentus gant ar benveg, ar pezh a laka degouezhioù farsus war wel – farsus hep gouzout d'an dud o-unan da gentañ. Mesket e vez an divoaz gant farsite ar jestroù pe an emzalc'hioù naturel, tapet war ar prim, gant joa ha teneridigezh. Gant an amzer a ra e Breizh, hag a ya da-heul plijadurioù an aod pe e vefe brav pe divalav, e vez lakaet Guy Le Querrec da dapout senennoù fentus ha dic'hortoz diwar-nij.

La mer en deuil

Le 16 mars 1978, l'Amoco Cadiz, superpétrolier qui achemine vers Rotterdam 227 000 tonnes de pétrole brut, provoque une gigantesque marée noire au large des côtes bretonnes.

Il s'échoue sur les rochers de Portsall dans le Finistère. En quelques jours, 300 kms de côtes sont polluées, entre Ouessant et Bréhat. Cette marée noire reste à ce jour l'une des plus importantes dans le monde, tragédie écologique encore vive dans la mémoire des Bretons.

Le plan Polmar est déclenché pour organiser le nettoyage ; Guy Le Querrec figure parmi les premiers photo-journalistes à couvrir l'évènement, réalisant plus d'une centaine d'images fin mars-début avril 1978 ; l'une paraîtra en couverture de *Télérama* le 12 avril 1978, suivie d'une sélection dans la revue.

Les habitants, notamment les agriculteurs, interviennent dès les premiers jours, utilisant les moyens du bord : tonnes à lisier, poubelles, sacs. Des centaines de volontaires mobilisés par des associations d'écologistes ainsi que des militaires parmi les appelés du contingent, ramassent le goudron à la main et à la pelle. Il faudra plus de six mois pour pomper ou disperser le pétrole et nettoyer les côtes bretonnes.

Ar mor e kañv

D'ar 16 a viz Meurzh 1978 e oa bet ul lanv du bras-spontus war aodoù Breizh abalamour d'ar mell eoullistr Amoco Cadiz, a oa o kas 227 000 tonennad tireoul krai da Rotterdam.

Peñseañ a reas war Geleier Porsal e Penn-ar-Bed. En ur ober un toullad devezhioù e voe saotret an aod war-hed 300 km, etre Eusa hag Enez-Vriad. Hiziv an deiz eo al lanv du-se unan eus ar re washañ er bed bepred, un darvoud skrijus e-keñver an ekologiezh ha n'eo ket bet ankouaet gant ar Vretoned.

Lañset e voe ar steuñv Polmar evit aozañ al labour naetaat ; edo Guy Le Querrec e-touez al luc'hskeudennerien-kelaouaerien gentañ a bledas gant an darvoud-se. Tennañ a reas ouzhpenn kant skeudenn e fin miz Meurzh ha penn kentañ miz Ebrel 1978 ; embannet e voe unan anezho war golo *Télérama* d'an 12 a viz Ebrel 1978 hag un toullad re all en diabarzh.

Kerkent hag an deizioù kentañ en em lakaas tud ar vro, dreist-holl al labourerien-douar, da naetaat gant an ostilhoù a oa en o c'herz : botennoù hañvouez, poubellennoù, seier. Eno e oa kantadoù a dud a-youl vat galvet gant

kevredigezhioù ekologour ha soudarded hag a oa oc'h ober o c'hoñje, o tastum an ter-du gant o daouarn ha gant palioù. Ranket e voe labourat e-pad ouzhpenn c'hwec'h miz evit pompañ pe distrewiñ an tireoul ha naetaat aodoù Breizh.

Esquisses du temps présent

Quand Guy Le Querrec revient en Bretagne dans les années 1970 photographe le monde du travail, c'est une région en profonde mutation qu'il saisit, loin des clichés habituels, au plus près d'une réalité, où l'on perçoit tout à la fois le progrès et déjà les causes de la future remise en question de ces nouveaux modèles.

Les images du monde agricole donnent à voir ce "grand basculement" des années 1960, avec l'héritage de polyculture familiale, bousculée par le changement de système agricole et l'arrivée du modèle agro-industriel lié à l'économie de marché : le remembrement, le secteur laitier ou porcin, les abattoirs... autant de signes de la mécanisation, de la spécialisation et de l'intensification de la production. Les hommes y adhèrent ou résistent. Les femmes sont aussi présentes, employées dans un autre secteur en mutation, celui de la pêche.

Mais la Bretagne est aussi terre de négoce et de commerce, à l'image du marché au cadran, ou d'industrie. Guy Le Querrec rentre dans les coulisses d'un monde laborieux, où se côtoient l'homme et la machine, l'homme et l'animal, l'homme et la nature. De détails incongrus, de cadrages décalés naît toutefois un sentiment de malaise vis-à-vis de ce système, vecteur de modernisation mais aussi dur et déshumanisé.

Tresoù an amzer a vremañ

Pa voe distro Guy Le Querrec da Vreizh er bloavezhioù 1970 evit luc'hskeudenniñ bed al labour e tapas skeudennoù eus ur vro hag a oa

cheñchamantoù bras enni, pell diouzh ar c'hlichedoù boas, tost ouzh ar wirionez. Enno e weler an araokaat ha, war ar memes tro, dija, ar pezh a vo kaoz d'an dud da lakaat ar patromoù nevez-se en arvar.

Gant ar skeudennoù eus bed al labour-douar e weler ar pezh cheñchamant a zegouezhas er bloavezhioù 1960, doareoù liesgounid hengounel an tiegezhioù diharpet gant ar modoù nevez p'en em gavas patrom al labour-douar industriel liammet ouzh an ekonomiezh varc'had : an adlodennañ, filierennoù al laezh hag ar moc'h, al lazhtioù... bep taol e weler merkoù ar mekanikaat, an arbenjikaat hag ar produiñ o vont war stankaat. Hag ar wazed da vont a-du gant se, pe a-enep. Gwelet e vez maouezed ivez hag a labour war un dachenn all, cheñchamantoù enni ivez, hini ar pesketa.

Douar ar c'henwerzh eo Breizh ivez avat, ar pezh a weler gant ar marc'had diouzh ar c'hresk, ha douar an industriezh. Mont a ra Guy Le Querrec e kostezioù ur bed labourerien, lec'h ma vez tud ha mekanikoù, tud ha loened, an dud hag an natur kichen-ha-kichen. Diwar munudoù digustum pe kouchoù dic'hortoz e vezer lakaet diaes koulskoude dirak ar reizhiad-se merket gant ar modernaat a zeu d'e heul met ivez, war un dro, kalet ha dizamant.

Être ensemble par Guy Le Querrec

Par le prisme de l'œuvre en noir et blanc de Guy Le Querrec, la Bibliothèque scrute les rapports sociaux en proposant vingt clichés qui font la part belle aux instantanés de liesse, de pugnacité et de complicité.

Une plongée vivante et intime dans les époques et les pays traversés par l'œil malicieux du photographe : de la France en plein essor touristique des années 70 aux mouvements de lutttes et de revendications, des scènes de jazz aux cérémonies cathartiques peules.

Bezañ asambles hervez Guy Le Querrec

Dre oberennoù gwenn ha du Guy Le Querrec, gant ugent skeudenn hag a gaver enne predigoù levenez, dalc'husted ha kenskoazell, e fell d'al Levraoueg sellet pizh ouzh an darempredoù sokial.

Kaset e vezer da splujañ da vat e kalon ar mareoù hag ar broioù lec'h m'eo tremenet sell gwidreüs al luc'hskeudenner : eus Frañs an touristerezh en e varr er bloavezhioù 70 betek an emsavioù hag ar stourmoù, eus al leurennoù jazz betek lidoù skarzh ar bobl Fula (Peul).